

KANTIK ENN ENOR DA ZANT BRIAK

WAR DÔN : *Laudate, laudate, laudate Mariam*

DISKAN :

Hon Fatron, Sant Briak, klevet ho pugale :
Ho miret a bep drouk, miret-he da Zoue !

I

1. Enn Hiberni ganet,
N'eur vro leun a fé,
Hon Briak oe zavet
E doujans Doue.
2. Ar bugel iaouank c'hoaz,
Er skôl kelennet,
Abred a zizkouéaz
Furnez ha spered.
3. Er bed ouz hen gortoz
Madou hag enor....
Hen 'wel er baradoz
Ar guellan tenzor.
4. Na c'houlenne bezan
'Met eunn dra bemde :
« Kristen mad er bed-man
Hag eur zant enn Ee. »

II

5. Hag hoc'h euz dilezet,
Briak, mamm ha tad ;
Dreist ar mór c'heuz douget
D'imp ar c'helou-mad !

6. O lestrik a zougaz
Briak ha Tual,
Douar Breiz, p'ho kuelaz,
'Zeuaz da zridal !
7. Gant Doue digaset
War hon douar-ni,
D'hon Zadou c'heuz disket
Karout... ha pedi.
8. Ann hano a gristen
C'heuz reit d'hon zud koz...
Hoc'h hano da viken
Vô gant hon parroz.
9. Sonj ho madelezou
Zo bev aman c'hoaz,
C'houez-vad ho vertuiou
Ken c'houek ha biskoaz.

III

10. O feunteun, ouz ho tour
Briak n'euz evet !
War he lerc'h ar c'hlavour
'Gav ennoc'h iec'het.
11. Na dous eo d'imp-ni
Mont war ho roudou,
N'eur gâna, n'eur bedi,
A dreuz d'ar parkou.
12. A dreuz d'ar parkou-ed,
A dreuz d'al lannek,
Dre greiz ar wâz a red,
Hed ann hent dourek.
13. Na dous eo d'imp-ni
Mont war ho roudou,
N'eur gâna, n'eur bedi,
Da c'houlen grasou.

IV

14. Grøet ma kerzimp dalc'hmadi,
Beteg ar maro,
War ho lere'h enn hent mad,
Fidel d'hoc'h hano.
15. Grøet ma virimp bepred
Dispont, kalonek,
Ar fe hoc'h euz c'hadet
Krenv 'vel hon c'herek !
16. D'hon bugale miret
Fe grenv ho zadou,
Miret d'he ho glanded
E kreiz ar reuziou !

V

17. *Botfô*, breman ken noaz !
Du-ze 'red bepred
Eur c'houlz zo deuz ar bloaz
Ar belerined !
18. Ha, ziouaz ! pa glaskont
Na gavont netra !...
Dreiz, spern, ken na gavont
Evid daoulina !
19. Vid ober ho feden
'Lec'h 're ho Fatron,
Na moger, na tôen !
Pebez rann-galon !
20. Pegoulz 'savo ann de
— Pegoulz e savo ? —
Ma welimp adarre
War grec'hen *Botfô*.

21. Ma welimp adarre
O sevel he fenn
Eur chapelik neve
War lein ar grec'hen ?
22. Eur chapel war al lec'h
'Pedaz da gentan
Briak hag he venec'h
P'arrujont aman ?
23. Pegoulz, *Botfô*, du-ze,
Pegoulz efomp-ni
Da *bardonna* ive
'Vel d'ar *Penity* ?

V I

Hon binniget breman,
Græt ma vimp ive
« Kristenien-vad aman
Ha zent barz enn Ee. »

G. R.

*ignier
person Kergist*

Nous permettons d'imprimer le présent cantique
en l'honneur de saint Briac.

Evêché de St-Brieuc, le 23 juillet 1889:

A. CHATTON,

Chan. Official Capitulaire.